



EUR VAM HAG HE BUGEL.

War don : *Ni ho sa'ud, Stereden tdr.*

Doe Gralon ha Guenole,
 Taolit eur zel a drugare
 War va bugel nevez ganet,
 Evit ma ho karo bepret!!!

Deoc'h her gwestlan, ô va Doue!
 Da Werc'hez Remengol ive!
 Hi eo Rouanez ar bed Oll,
 Hag a viro n'he dai da goll.

Va mabik, va elik Doue,
 Va elik dous, va c'harante,
 Te a so koant enn da gavel,
 Koant ha laouen evel eun el!

Ar vuez mâ a zo c'huero,
 Karget a boan hag a zaelo!
 Doue roi dit, va bugel paour,
 Feiz, esperans, eur galon aour!

Eur galon aour ha karantez
 Da dremen leal da vuez!
 Ra vi bepret karantezus
 Vel ma oa ar mabik Jesus!

Petra vezi war ar bed ma ?
Evel da dad eun den a boan !
Marteze vi barz pe beleg ,
Soudard , martolod pe tieg !

Doae hep ken oar ann dra-ze ,
Ha ra vo gret he volonte !
Er joausted hag enn anken ,
Te a vo fidel d'he lezen .

Dindan ar walen a gasti
Plega alies a renki :
Ann eurusdet na gaver ket
E-pad ar vuez war ar bed !

Kemer da boan a galon vad ;
C'hoars ha dour enn da zaoulagad ,
Pa deui ann deiz ma vi skoed
Gant ann anken ha treid ar bed .

Pa vi gant ann holl dilezet ,
Pa vo da galon paour mantret ,
Beuzet enn eur môr a c'hlae'har ,
Sell va mab , sell Mene-Kalvar !

Kousk ase brao , c'hoaz out bihan ,
N'ouzout ked c'hoaz petra eo poan ,
D'az c'hoad e ver er baradoz !...
Ann den a oar-ze pa ve koz .


Kar da vam , va elik Doue ,
Mervel evidout a rafe !...
Enn he c'hozni , enn e foanio !
Va mab , te zec'ho he daelo .

Pa vezi bras , hi a vo kôz !
Pa vo maro , evit renoz ,
Laka he c'horf enn disheol
Enn bered santel Remengol !

Kar ha ped ann aotrou Doue ,
He vignonet sent Breiz ive !
Kar ha ped Gwerc'hez Remengol ,
Ha birviken ne di da goll .

I.-P.-M. AR SCOUR,

BARZ I.-V. REMENGOL.



ANN DURZUNEL BAOUR

HAG

AR SPARFEL FISTOULIK.

« Neb na zent ked ouz ar slar ,
» Ouz ar garrek a rai zür. »

War don : Pen-Herez Keroulas.

Eul labous koant , eunn durzunel ,
Ganet e koajou Breiz-Izel ,
A gavaz mad kuitaat he neiz
Evit mont pell , pell euz a Vreiz.

Er Ponthou e oa eur sparfel ,
Koz , sod , divez ha farouel ,
Eon he gozni ne furee tamm ,
Kanfart e oa a neve-flamm.

Ar sparfel-ze fistoul , traitour ,
D'ann durzunel a ra heg flour ;
Ann durzunel baour a grede
E oa ar sparfel he Doue.

He far a lavaraz d'ez-hi :

- Aman e vezvez dizoursi ;
- « Aman gant da vignon fidel ,
- Eo brao beva , vo dous mervel.

- « PeH diouz da neiz , ar ienien ,
- « Ann naon , ar zec'hed , ann anken ,
- « Ar glao , ann erc'h hag ar glac'har ,
- « Vo da loden war ann douar.

- « Da vignon traitour ar sparfel ,
- « Enn noaz az lezo da vervel !...
- « Mervel a zo eunn dra c'huero ,
- « Pa varver pell , pell diouz ar vro !...

- « Aman gan-i-me chomm ato.
- « Va askellik da ziwallo ;
- « Da neizik flour vo tomm bepret ,
- « Ha gant da bar e vi karet.

- « Evel ann costik er c'hoajou ,
- « Me a gano d'id va zoniou ;
- « Ha dre bevar c'horn Breiz-Izel
- « Te vo ar goanta turzunel. »

Hag ann durzunel digalon
A gimiadaz ouz he mignon ,
Evit mont da heul ar sparfel
Pell diouz he neiz ha Breiz-Izel.

Likit evez , turzunellik ,
Ar sparfel zo eur fistoulik !...
Er broiou all ne gefot ket
Eunn neiz , eur mignon d'ho karet.

Ann durzunel e deuz ankouet
He neiz hag he far glac'haret ;
Ha d'ar sparfel gant follentez
E deuz roet he c'harantez.

Allas ! ne oa ket red mont pell
Evit anaout mad ar sparfel ;
Ar sparfel zo bet didruez
E kenver ann durzunel gez.

Pa oent erru dreist Mene-Bre ,
Ann taol pao kenta e devoe ,
Hag araog mont er meaz a Vreiz ,
E teu da zoufal enn he neiz !!!

Meur a daol beg e deuz tapet
Allaz ! evit bea re garet....
Eleac'h soniou he dousik koant,
E deuz brema toliou dre gant.

Ar sparfel 'n deuz he mac'hagnet,
Er vouillen en deuz he sklabeet,
Enn eur c'hoarzin, laraz d'ez-hi :
Kerz brema gant nep a gari !...

He c'horf karget a c'houlou,
He c'halon karget a boaniou,
Ha beuzet holl enn he glac'har,
E sonjaz neuze enn he far.

« Va far, mignon karantezuz,
« Am euz lakeet ken maluruz,
« Ma welfez penoz ar sparfel
« En deuz sklabeet da durzunel !!!

Ann durzunel dizenoret,
Gant poan ann hent e deuz bet gret,
Da vont tre beteg he neizik,
Evit gwelet c'hoaz he c'hoantik.

E c'harz ann noiz pa 'n em gavaz,
He c'halonik paour a rannaz,
Pa welaz maro he mignon,
Maro, siouas ! gant rann-galon !!!

KELENNADUREZ.

Merc'hed iaouank a Vreiz-Izel,
Lakit evez ouz ar sparfel....
Pedit Doue n'eot ket da goll,
Ha pedit gwerc'hez Remengol !!!

I.-P.-M. AR SKOUR,

BARZ I.-V. REMENGOL.



MEZ ANN DUD.

**AR MILIONER
FALS PINVIDIK.**

War don : Gour'hemennou Doue.

Horesco referens.

Ha te, tousek koz, mez ann dud,
Milioner, hervez ar brud,
Dastum 'ta madou; bern war vern,
Mez ann dud, m'at 'ri d'ann ifern.

Bed oud a viskoaz eur ribler,
Rag-ze oud deut milioner.
Dastum 'ta etc.

Biskoaz ne c'heuz bet eur mignon,
Rag n'oud ket eun den a galon.
Dastum 'ta etc.

E Breiz ann dud, braz ha bihan,
A lavar ez oud eur pagan.
Dastum 'ta etc.

Da deot lous a zo binimus,
Vel ann aer viber oud flemmus.
Dastum 'ta etc.

Biskoaz ne c'heuz great aluzen,
D'ann dud ezomek, d'ar beorien.
Dastum 'ta etc.

War ar paour e toull dor da di
Didrue, c'heus hiset da ghi.
Dastum 'ta etc.

Gwerzet c'heuz ar sent ha Done
Ha flipet arc'hant evit-he !!!...
Dastum 'ta etc.

Madou diwar goust ilizion,
Ia da houarna ann diaoulou (1).
Dastum 'ta etc.

Peurlipet c'heuz diner ar paour,
V'it peurgarga da ialc'had aour.
Dastum 'ta etc.

Goad ar paour kez e c'heuz sunet
Ha gant ann naon eo bet marvet.
Dastum 'ta etc.

He vreg hag he vugaligo
Zo gant ann naon ive maro.
Dastum 'ta etc.

Kreiz ar goanv, enn noz, int maro,
Enn noaz, war eun dornad kolo.
Dastum 'ta etc.

Da vintin, war dour Remengol,
Oa gwelet GWERC'HEZ REMED HOLL.
Dastum 'ta etc.

(1) Ann dud koz e Breiz a lavare, hag ann dra-ze a zo gwir : « Ar pezh
a deu digant ann diaoul a ia d'enn houarna, ha c'hoaz e chom eun troad
d'ezhan dishouarn. »

'Tiguemer he bugaligou ,
'Vit ho c'has gant-hi d'ann Envou.

Dastum 'ta etc.

Tre he divrec'h karantezuz ,
Deuz ho douget beteg Jezuz.

Dastum 'ta etc.

Mab Doue n'en doa ket eur meen ,
Evit harpa war-n-han he benn.

Dastum 'ta etc.

Jezuz , mestr ann env, ann douar ,
Zo maro war mene Kalvar.

Dastum 'ta etc.

Ha te , diskibl ann Doue-ze ,
Kenver ar paour oud didrue.

Dastum 'ta etc.

Ar paour , du gant ar baourente ,
Zo eur mignon braz da Zoue.

Dastum 'ta etc.

'Fals pinvidic gant he vadou ,
Zo mez ann dud , boed ann diaoulou.

Dastum 'ta etc.

Diwar goust ar paour ha Doue ,
Brema millioner oud-te.

Dastum 'ta etc.

Malloz ar paour , malloz Doue
Vo da viken war da ene.

Dastum 'ta etc.

A drugare Doue , oud koz
Hep dale pell e koei er foz.

Dastum 'ta etc.

Enn devez m'ha renki mervel ,
Vo joäüsdet e Breiz-Izel.

Dastum 'ta etc.

Da heritourien a c'hoarzo ,
War da vez ann drein a zavo.

Dastum 'ta etc.

War da vez ann drein a zavo ,
Dour biniget , peden n'az po.

Dastum 'ta etc.

Dour biniget , peden n'az po ,
Hag ann diaoul da *fistouliko*.

Dastum 'ta etc.

I.-P.-M. AR SKOUR,

BARZ I.-V. REMENGOL.